

Frañsizañ – Nozvezh kentañ ma eured Distro ar martolod

Plinn

TT – Anthologie Marcel le Guilloux

(Na Doue da goñsolo ur c'halon glac'haret
'Vel kalon ur plac'h yaouank an noz hentañ hec'h eured)

Nozvezh kentañ ma eured me `m oa komerdamant
D'hont da servij ar Roue ret eo bezañ kontant

D'hont da servij ar Roue da souten ar armoù
Ha ma dousig Frañsizañ a chom er gêr da ouelo

«Tevet, tevet, Frañsizañ, tevet na ouelet ket
'benn un daou pe un tri bloaz me a deuy c'hoazh d'ho kwelet

'Benn un daou pe un tri bloaz pe ur pevar d'an hirañ
Me a deuy c'hoazh d'ho kwelet, ma dousig Frañsizañ

Tremenet e oa daou ha tri bloaz, ar pevared hag ar bempved
Hag ar martolod yaouank ne deu ket tamm da vale

(Tremenet e oa ar c'hwec'hvet bloaz hag ar seizhvet komañset
Hag ar martolod yaouank e-barzh ar gêr n'errue ket)

Frañsizañ a oa yaouank a gave hir hec'h amzer
Ha n'oa lakaet e-barzh en e soñj dimeziñ adarre

Dimezet hag eurejet ha deus an daol o koaniañ
'C'h erruas ur martolod en ti da c'houl lojañ

Digant ar vatezh vihan en deus gullet digentañ:
«C'hwi a zo kat da lâret din ma ven lojet amañ»

«O salv-ho-kras emezi amañ ne viet ket lojet
Tud an eured a zo amañ gante ec'h on okupet.

Tud an eured a zo amañ gante ec'h on okupet

Ha gant an dra-se martolod amañ ne viet ket lojet.»

Ar matolod a oa ur paotr fin goût a rae an douare
Ac'h eas da gaout e dantin gozh e-barzh en ur gambr a
gostez :

«Boñsoar deoc'h `ta moerebig gozh, boñsoar deoc'h e lâran
C'hwi a zo kat da lâret din ma vin lojet amañ

Me a zo ur martolod yaouank deus an arme distroet
N'am eus ket na ti na loj na gwele `bet da gousket

N'am eus ket na ti na loj na gwele `bet da gousket
Teñval eo ar glav a ra ne oaran ket pelec'h monet

Teñval eo ar glav en oaran ket pelec'h monet
Ur sac'h ler a zo war ma c'houk serten me a zo sammet.»

«O ya sur eta martolod amañ c'hwi a vo lojet
E-barzh en ur gwele a bluñv e viet lakaet da gousket

E-barzh en ur gwele a bluñv e voet lakaet da gousket
Hag ho koan e tebrihet gant an tud eured

Disammet ho malizenn hoc'h aour hag hoc'h arc'hant
Asembles gant an tud an eured c'hwi a goanio ekselant.»

Ne oa ket debret mat o c'hoan gant ar rummad kentañ
N'eus goulennet ar c'hartoù evit en em divertisañ

N'eus goulennet ar c'hartoù, pe an dominoioù
Peotramant ar wreg eured ga gaozeal gantañ

Kaer en devoa kaozeal dezhi ne gaozee ket
Ken en doa bet komzet dezhi deus he gwalenn eured:

« Pelec'h amañ ho kwalenn aour hag ho tiamanchoù

peseurt re em boa roet deoc'h bremañ a zo seizh vloaz zo

Pelec'h emañ ho kwalenn aour hag hoc'h hini arc'hant
Peseurt re en boa roet deoc'h deus taol ar sakramant? »

Ha hi e juntas he daou zorn oc'h ober ur sell sag krec'h
« Betek bremañ ma Doue me am boa bevet dinec'h

Betek bremañ ma Doue dinec'h me am boa bevet
Dec'h d'an noz e oan intañvez, fenz am eus daou bried

Dec'h da noz e oan intañvez, fenz am eus daou bried
Da davet pehini anezhe ec'h in fenz da gousket

Davet an hini kentañ e oa organet din monet
Hag egile-all ac'h ay d'ar gêr evel a oa deuet.»